


HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn	2
	Petra nevez ?	7
	Kelaouennoù	23
	Notennoù	34
	Roll pennadoù 2015	43

Herve LATIMIER

**The Devil's Seal, A Sister
Fidelma Mystery,**
gant Peter Tremayne,
Headline, 2015,
354 fajenn, £8.99




25^{vet} levr enklaskoù Fidelma a gCashel ! Tremen a ra an traoù e 671. Dont a ra ur manac'h Sakson da gemenn da gGolgú, roue Muman ha breur Fidelma, ez eus ur c'hannad a-bouez a-berzh Roma war e hent evit e welout. Kavout a reer ar manac'h-se drouklazhet. Tri c'horf all a gaver nepell diouzh Cashel hag un den gloazet-kaer... Setu

penn kentañ an istor. Muntrouñ all a c'hoarvez a-raok fin an istor... Kavet em eus un tamm luziet ha diaes da grediñ digarez an darvoudoù : deuet oa Verax, kannad ar Pab, da zegas da dTheodore, arc'heskob Canterbury dafar evit ober eus un den anvet Wilfrid arc'heskob kentañ York, met ne oa ket anv Wilfrid war lizher ar Pab... ; laeret 'oa

bet digantañ an dafar ha kaset da Iwerzhon evit bezañ gwerzhet d'unan en dije c'hoant bezañ arc'heskob... Kalz tud lazhet (ouzhpenn dek) evit nebeut a dra a c'heller soñjal... Daoust da se ez eus, evel boaz, darvoudoù e-leizh, un enklask renet mat gant Eadulf ha Fidelma, un diskoulm un tamm dic'hortoz ha traoù da zeskiñ... Deskiñ a reer, da skouer, e felle da Roma aozañ Iliz Iwerzhon war patrom

an Iliz Latin ha klask envel un arc'heskob (Abad Ard Mhacha sañset) hag e oa prest un nebeud Iwerzhoniz da vont a-du ha da itrikañ evit kaout ar garg... Tremen a ra kalz traoù e palez Cashel hag e kêr Cashel hag ober a reer anaoudegezh gant breur yaouank Eadulf, Ergric. Roll Aedulf a zo pouezus en istor. Evit gouzout hiroc'h lennit al levr...

**Suicide de l'Occident,
suicide de l'humanité ?,
gant Michel Rocard (gant
skoazell Jules Fournier),
Flammarion, 2015,
430 pajenn, 22,90€**




Dedennus eo al levr-mañ. Degas a ra nec'hamant ivez. Ma kav un den bet kentañ ministr Frañs ez eo ret skrivañ seurt levr evel ma kav ret ar Pab Frañsez skrivañ *Laudato si...* e c'hellomp krediñ ez eo tremen poent sellout ouzh stad ar bed evel m'emañ. Daouzek chabistr : eizh o taolenniñ stad ar bed, pevar o tiskouez hentoù a c'hellfe degas

diskoulmoù. Setu titloù an eizh chabistr kentañ : *De terribles mutations enchevêtrées ou l'espèce humaine à la vaine recherche de la stabilité ; La mort lente du politique ; Le monde malade de l'argent ; Le dieu Marchandise ; Le ravage de la niche écologique menace la vie ; Disqualification d'une science : l'économie Déshonneur d'une*

profession : la banque ; Le virus toxique : l'intérêt national, la souveraineté ; Comment meurent les sociétés. Hag ezhomm a zo da zisplegañ hiroc'h ? Pedagogel eo doare Michel Rocard (evel boaz) daoust ma c'heller

bezañ hegaset gant barnadennoù graet un tamm re vuan (diwar-benn Bro-Skos da skouer) pe gant traoù adlavaret meur a wech. Ul levr da vezañ lennet. Ul levr a laka da brederiañ. Gant ma vounto d'ober...

Loué sois-Tu Laudato Si, Lettre encyclique du Souverain Pontife François sur la sauvegarde de la maison commune, Salvator, 2014, 192 pajenn, 3,90€




O lenn levr Michel Rocard, *Suicide de l'occident, suicide de l'humanité ?* e oan bet souezhet gant ar frazenn-mañ (p354) : « [...] *si les grandes religions limitaient moins leur influence, leur réflexion et leur action à la morale et à la conduite privée des êtres humains pour s'intéresser davantage aux règles qui régissent leur vie commune, peut-être multiplierait-on les acteurs de ce nécessaire sauvetage !* ». Souezhet on bet n'en defe ket klevet komz eus lizher-meur ar Pab Frañsez... Souezhetoc'h on bet c'hoazh

p'em eus gwelet pegen heñvel oa o dielfennadur, o nec'hamant ha zoken an hentoù kinniget evit stourm ouzh ar saviad : gwikefre diroll un ekonomiezh renet gant an doue marc'had, dic'halloud ar politikerezh da welout war hir-dermen, al liamm start etre stourm ekologel ha stourm sokial, hent-dall an diskoulmoù war live ur stad nemeti, an ezhomm da cheñch sell war an traoù, an doare d'ober hag ar spi e labour a-stroll ar geodedourien hag emzalc'hioù pemdeziek pep hini ac'hanomp. Evel-just e ro ar Pab ur sell speredel war e breder

ha lavarout a ra traoù ne blijint ket d'an holl. Ar pouezusañ eo ar galv graet gantañ d'ar gatoliked ha d'an holl dud "a volentez vat" da stourm... Displeget fraezh eo an traoù, sklaer eo an arguzennoù. Ma klever

ar galv nerzhus-se e c'hello dont da wir het Michel Rocard gwelout lieskementet niver ar vicherourien o labourat evit delc'her a-ratre hon ti boutin. Poent eo. Un destenn a bouez bras eo *Laudato Si*.

**Enigma of China, An
Inspector Chen Novel,**
gant Qiu Xiaolong,
Mulholland Books, 2015,
278 pajenn, £8.99



Bro-Sina a-vremañ : internet, stourm an *netizens* ouzh ar stad ha stourm ar stad outo, ar sevel tiez e Shanghai ; arc'hant bras, arvrokerezh, politikerien gwerzhed. Taget eo bet unan eus pennoù ar Strollad Koumunour e Shanghai ha rener Komite Diorren an Annezioù gant ar *netizens* (ur ger bet krouet o veskañ *net* ha *citizens*) goude ma vefe bet lakaet ur skeudenn anezhañ war ar rouedad. N'hell ket ar Strollad e zifenn e-pad pell. Kavout a reer anezhañ krouget er gambr otel ma oa dalc'het enni. Emlazh pe muntr ?

Kregiñ a ra meur a enklask gant servijoù n'o deus ket memes sell war an traoù... Anvet eo Chen Cao kuzulier strollad enklask polis Shanghai... Un daolenn resis (ha nec'hus) eus ar gevredigezh sinaat, he dislavarou, dislavarou pep Sinaad, a zeu da vezañ peur-zivezh ha pilpous evit gellout ober e hent pe treuzvevañ nemetken... Savet mat eo an istor, dedennus eo an tudennoù evel da gustum. Pouezus eo ar boued atav ha bepred ken dipitus an darempred etre Chen hag ar merc'hed... Santout a reer e krog


an haroz da hegasiñ uhelidi zo
hag emañ war un hent arvarus
rak emañ, evel kalz re all, o
klask e hent etre ar galloud (ezel
eus framm ar Strollad eo, ur
garg uhel en deus er polis) hag e

goustiañs (ur barzh eo ha leve-
zonet eo gant mennozhioù koñ-
fusiour e dad). Hast 'm eus lenn
ar romant kentañ... Kemm vo en
e saviad moarvat.



**Herve LATIMIER,
Stefan CARPENTIER &
Malo BOUESSEL du BOURG**

Divemor,
gant Pierre-Emmanuel
Marais,
Al Liamm,
126 pajenn, 12€



Elouan. Ne oar ket muioc'h ar paotr a zihun er c'hlañvdi. Estreget-se ez eo divemor. Ankouaet ar galleg gantañ zoken. Un tamm bec'h a vo gant ar c'hlañvdiourezed betek ma vo kavet ur mezeg hag a oar brezhoneg, Goulven Rioù e anv. Hemañ, daoust ma kav iskis an doare divemor en deus Elouan, en skoazello da vont war hent e eñvor. Harpet e vo ivez gant

merc'h ar mezeg, Anjela. Tamm-ha-tamm e kavo roudoù eus e vuhez kent, traoù a vefe bet gwell gantañ chom hep diskoachañ, traoù hag a zispleg penaos eo degouezhet er c'hlañvdi.


An neb a goll e vemor a goll un tamm mat eus e bersonelezh war an dro. Rankout a ra kavout un hent nevez etre ar seurt den e oa hag an den a fell dezhañ dont da vezañ. Mont a-ribourzh evit

gallout mont war-raok. Sed aze diac'hinad an dud. Deuet eo brav a-walc'h gant Pierre-Emmanuel Marais. Lennet em eus e levr en un tenn koulz lavaret. Dedennus eo an tudennoù hag an darempredoù etreze – goude ma 'm befe dilamet tudenn Mari pe da nebeutañ cheñchet an darempredoù etre Elouan hag hi

rak krediñ a c'haller he devo ur perzh brazik er romant ha n'he deus ket erziwezh. Renet mat eo ar steuenn ha tapet on bet buan gant ar c'hoant gouzout hiroc'h diwar-benn Elouan hag an dibaboù a rafe evit ren e vuhez adarre.

SC

Poltred Dorian Gray,
gant Oscar Wilde,
brezhoneg gant Alan Martel,
An Alarc'h,
356 pajenn, 14€



« Pa fell d'an doueed hor c'hastizañ e klevont hor pedennoù, » en doa skrivet Oscar Wilde. *Poltred Dorian Gray* en diskouez splann. An arzour Basil Hallward en deus livet ur poltred hollgaer ha feal-kenañ eus Dorian, ar paotr yaouank pinvidik, brav eston-se, ken ma seblant ar poltred-se bezañ un eilad bev eus Dorian. Embann a ra hemañ diwezhañ e rofe e ene evit ma chomfe divoulc'h e gened hag e yaouankiz tra ma

koshafe e boltred en e lec'h. Dont a raio e het da wir dre un iskis a alkimiezh. Bet en do Dorian e vennozh eta, ha betek penn ! Ken tragek e vo e donkadur hag hini *Faust* pe hini penn-dudenn *La peau de Chagrin*... Goude bezañ karet ha distaolet un dremmourez yaouank he c'halon c'hlañn e reno Dorian ur vuhez andivezel ma n'eo ket enepdivezel, o saotrañ kement tra ha kement hini en do tro da zaremprediñ. Levezonet eo gant

e vignon Lord Henry, anezhañ ur pipi speredek ha kinek, troet gant an hedonegezh. Ul levr a brofo Lord Henry da zDorian, ma vez displeget mennozhioù al luskad *Décadent* a oa en em ledet e Frañs e fin an XIX^{vet} kantved. Ur meskaj blizidigezh ha skeptegezh diachantet. Ne vez ket meneget titl al levr kevrinus-se, met degas a ra da soñj eus levr Huysmans, *À rebours*, ma vez meret un den yaouank gant ar benndudenn, Des Esseintes.

Romant nemetañ Oscar Wilde eo *Poltred Dorian Gray*. Sammet en doa dismegañs war e chouk abalamour d'an oberenn-se dre ma oa bet treusintet. N'eus nemet un dra a oa bet komprenet peurvut evit doare : c'hoarzhin goap a rae Wilde ouzh pilpouserezh ar gevredigezh viktorian. Intret eo romant Wilde gant e vuhez dezhañ e-unan ha gant e vennozhioù. Ur spered lemm hag un teod loskus e oa. Peadra da feukañ ar vourc'hizien verrsperedet ha kemplegour. Kondaonet e oa bet taer, a ouzer a-walc'h, en abeg d'e heñvelreviadezh.

Ne sav ket Wilde a-du gant Dorian Gray, na gant Lord Henry, na c'hoazh gant Basil

Hallward. N'emañ ket ar wirionez gant hemañ-henn. « N'eus doug divezel ebet gant an arzour. » « Evit an arzour ez eo ar preder hag ar yezh binvioù an arz. Evit an arzour ez eo ar sioù hag ar vertuzioù dafar e arz. » Spiswel eo Lord Henry, met digalon eo. Heolheñvel eo Dorian Gray, met gwan ha levezonadus. Donezonet ha brokus eo Basil Hallward, met eeunik... Dibunañ a ra Wilde mennozhioù divoutin, gant o nerzh hoalus ha yael, koulz hag o nerzh distrujus. Un oberenn binvidik ha kemplezh eo *Poltred Dorian Gray* eta. Studiet e vez enni al liammoù etre an arz hag ar vuhez. N'hello ket an dremmourez yaouank c'hoari mat ken, kentizh ha ma vo bastet ezhommoù he c'halon gant karantez Dorian... Prederiadennoù a vez displeget diwar-benn ar c'hrouiñ, ar feiz, ar yaouankiz, orin hon talvoudoù, ster ar vuhez, atebegezh an den... « Nep piv bennak, tapet gantañ e zaou-ugent vloaz, a zo kiriek eus e zremm, » a lavare Leonardo de Vinci. Dorian en deus ur mele-zour, ma sell ouzh e skeudenn a-ziavezh. Ur maskl n'eo ken, mat da douellañ ar gevredigezh. Taolenn e boltred, en enep, bet

savet gant un arzour, a ziskouez gwirionez euzhusoc'h-euzhusañ e ene. Kuzhet eo bet gant Dorian en e c'hrignol, dindan ul lien. N'eus nemetañ hag en deus an aotre da sellout outañ. Met sorc'hennet eo e goustiañs gantañ. Ur misi evit ur bredelfenner !

Ul livadur didruez eus ar gevredigezh saoz e fin an XIX^{vet} kantvet eo *Poltred Dorian Gray*. Met da gentañ holl ez eo un oberenn arzel, intret gant un aergelc'h mougus ha fantastek, treuzet gant ur fent kriz. Un

oberenn e vefe ur gwall dremen hep he lenn neuze.

Evit ar re o defe c'hoant da lenn oberennoù all gant Oscar Wilde e brezhoneg :

Tasmant Canterville, brezhoneg gant Elen Maze, *Aber* niv. 27, 28, 29.

Ur vaouez a netra, pezh c'hoari, brezhoneg gant Elen Maze, *Aber* niv 17.

Danevellou, brezhoneg gant Jean-Claude Miossec, Emgleo Breiz.

MBdB

Ar morgazh,
gant Jakez-Erwan
Mouton,
Keit Vimp Bev,
174 pajenn, 6€



Ornella Natale zo ur gaze-tennerez italian oc'h ober un enklask e Somalia diwar-benn un trafikerezh danvez pistrius. Siwazh n'he devo ket kalz amzer evit kas he labour da benn rak lazhet e vo buan, koulz ha Giovanni Papino, paotr ar c'hamera a laboure ganti. Kaset eo ar

c'homiser Urbani da imboursc'hañ war ar muntr. En em gavout a ra etre brec'hinier ar Morgazh neuze ha mennet mat eo d'en dibennañ.


Ur romant polis savet mat eo *Ar morgazh*. Kaset eo al lenne-rien etre dodennoù an ekologiezh, ar sponterezh hag ar

Mafia. Lusket mat eo, gant chabistroù berr. Dav deoc'h gouzout ez eo ur romant du hag an doare yezh a ya da heul. Na spontit ket eta gant ar bommoù gros pe hudur a gavot ennañ. Souezhet e oan bet da gentañ pa oa skrivet war ar golo « Priz ar

yaouankiz » abalamour da se, met er rummad 3^{de}/lise emañ. D'an oad-se n'eur ket dizesk ken. Klotañ a ra mat gant an doare lennegezh ha ned a ket ken pell ha Frédéric Dard da skouer.

SC

**En ur lenn Tangi
Malmanche,
gant Morgan ar Menn,
Aber,
168 pajenn, 13€**



Gant skipailh *Aber* e vez kaset da benn tamm-ha-tamm ur raktres a bouez anvet « Erbar Malmanche ». Gant-se e vo adembannet skridoù pennañ an aozer, bet moullet e brezhoneg pe e galleg, pa n'eo ket en div yezh. Kinniget e vo ivez skridoù chomet diembann, evel *Les Androgynes* ha *L'horrible assassinat de M. Talabardon* hag a zo o paouez dont er-maez gant ur pennad-kinnig sinet gant Pierrette Kermoal.

Malmanche, a ouzer a-walc'h, a zo bet un diaraoger, gant *Spered ar Vro*, ar gela-

ouenn berrbad-se a voe savet gantañ 22 vloaz a-raok *Gwalarn*. Kontet eo da vezañ unan eus hor skrivagnerien bouezusañ, gant e bezhioù-c'hoari dreist-holl. Lod eus e gontadennoù skrivet e galleg a zo eus ar c'hentañ troc'h, kenkoulz all, bezañ m'int nebeutoc'h anavezet gant ar vrezhonegerien. Evidon-me eo *Kou le Corbeau* ur misi. Adembannet eo bet gant *Aber* war-lene.

Dek vloaz zo bremañ e vez Morgan ar Menn o studiañ buhez hag oberoù Malmanche. Ingal eo bet embannet he

fennadoù-barn e-barzh *Aber*. Ur brezegenn he doa distaget ivez da geñver kendael bloaz *Aber* e Kemper e 2011, ma kinnige un dampskeud eus labour Malmanche. Strobet eo bet holl he fennadoù mui div studiaden diembann dindan an talbenn *En ur lenn Tangi Malmanche*. Dielfennañ a ra skridoù pennañ hag arvezhioù pouezusañ an oberenn : fent kriz Malmanche, ar bed all kenweet gant ar bed-

mañ, nerzh ar revelezh. Diskouez a ra ivez penaos en deus graet Malmanche e vad eus un darvoud istorel, an tangwall en doa distrujet tour plom Iliz-Veur Kemper e 1620, evit reiñ buhez d'ur gwir oberenn lennegel. Ul labour a-feson a zegas c'hoant bras da adlenn pe da adwelout war al leurenn kontadennoù ha pezhioù-c'hoari Malmanche.

MBdB

Persepolis,
gant Marjane Satrapi,
brezhoneg gant Tual Kerrain,
Embannadurioù Goater,
364 fajenn, 29€



Na plijus lenn levr hollvrudet Marjane Satrapi e brezhoneg, pa 'm boa klevet anv anezhañ ken lies gwech anez kavout amzer d'ober ouzhpenn e follennata. Ur skrid-buhez eo an oberenn zibar-se, kinniget e stumm ul levr bannoù-treset e gwenn-hadu. An tresadennoù koulz hag an testennoù a zo bet savet gant Marjane Satrapi hec'h-unan, e doare ma kenson peurvat an eil

re gant ar re all. Tresadennoù eeunaet, bugelel a-wechoù, intret gant fent ha gant barzhoniezh, e-giz ma tiflukjent eus pluenn ar baotrez a zo o kontañ deomp he zammig buhez. Ar peder levrenn orin a zo bet strollet en ur pikol levr gant *Embannadurioù Goater*. Alese ur priz-gwerzhañ uhel a-walc'h. Talvezout a ra ar fred avat. Boued spered, deskamant ha


plijadur zo da gaout. Un Iranadez eo Marjane Satrapi, bet ganet e 1969. Kregiñ a ra *Persepolis* e Teheran, gant mare an dispac'h islamek e 1979 ha diskar renad aotrouniek ar Chah. Dizale ec'h anavezaz ar boblañs antronozioù dic'hoari pa voe dispaket e jeu gant Khomeini hag ar republik islamek nevez : lazhet an eneberien, berzet kemmesk ar baotred hag ar merc'hed er skolioù... Echu gant al laikelezh ha ret d'ar maouezed sujañ da reolennoù strizh, e-giz dougen ar ouel, dindan boan da vezañ kastizet rust. Nebeut goude, kerkent ha 1980, e voe taget ar vro gant Irak. Un hir a vrezel diskiant a badas eizh vloaz hag a lazhas ouzhpenn 500 000 a dud. Setu neuze al leurenn ma kresk Marjane, anezhi ur plac'hig bet ganet en ur familh tud desket ha digor o spered. Evit he gwareziñ diouzh ar brezel ha diouzh doareoù kilstourmus ar renad bonelour e kasont o merc'h da lise Gall Vienna en Aostria. Re yaouank eo ha ne zeu ket a-benn d'en em ober ouzh ar vuhez du-hont. Kantreadez e teu da vezañ, war var he buhez. Distreiñ a ra en he bro. Met diaes eo d'ar grennardez disuj boazañ ouzh doareoù

nevez he c'henvroadezed hag he c'henvroidi. Dibab a ra divroañ adarre evit peurechuiñ he studioù e Frañs, e-lec'h m'he deus graet hec'h annez abaoe.

Ur veaj deskoni stroñs-distroñs eo *Persepolis* e-kreiz ur bed o virviñ. War seulioù Marjane ha gant daoulagad ar plac'hig, ar grennardez hag erfin ar plac'h nevez, ez arvester ouzh istor kempred ar Reter-Kreiz, ouzh stokadenn an ideologiezhioù hag ar sevenadurioù e fin an XX^{vet} kantved, ouzh buhez an divroidi o tegouezhout e kêrioù bras ar C'hornôg. Sed alc'hwezioù prizius evit kompren hor bed.

MBdB

Fours à pain de Bretagne,
gant Albert Poulain,
Yoran embanner,
312 pajenn, 30€



Piv n'anavez ket Albert Poulain, konter, kaner, ti-savour hag etnologour ? Brudet eo bet evit e labour divent evit glad Breizh hag hini Bro-C'hallou peurgetket. Resevet en doa *Kolier an Erminig* e 2004.


Aet eo da Anaon d'ar 6 a viz Here 2015. Ra vo skañv douar Breizh evitañ !

E oberenn ziwezhañ eo al levr-mañ eta. Un oberenn a oa tost d'e galon. Michel Humann

hag Bernard Rio o deus sikouret evit peurechuiñ al labour. Sklaer a-walc'h eo an titl. Ur bern titouroù a gaver war ar fornioù, penaos e oant savet, met ivez a-zivout an doare ma oant implijet hag ar mojennoù diwar o fenn. Ur bern skeudennoù, tresadennoù, tresoù a zegas d'al levr un dalvoudegezh dibar. Da vezañ renket e rummad al "levrioù kaer"...

HL

**Ar Gelted kozh, I. An
ergerzhout hag ar
c'henwerzh,**
gant Mordiern, Abherve ha
Serj Pineau,
An Alarc'h,
96 pajenn, 12,50€



Anavezet eo (pe e voe...) labour Meven Mordiern diwar-

benn ar Gelted kozh, bet lakaet e brezhoneg gant Frañsez Vallée


(Abherve) tost da gant vloaz zo. Eus 1911 da 1922 e voe embannet an *Notennoù diwar-benn ar Gelted kozh* e stumm levrioù-igoù. Strollet e voent en un embannadur klok e 1946 gant *Editions de Bretagne*. Ne oa skeudenn ebet gant an destenn d'ar mare-se.

Serj Pineau, bet ganet e 1931, a zo ur grafour bet stummet en *Ateliers des Beaux-arts* e Montparnasse. Sot eo gant sevenadur ar Gelted ha bourrañ a ra gant *Sketla Segobrani*. Goude bezañ studiet aketus an *Notennoù* en deus savet tresadennoù resis ha kaer da vont ganto.

Kinnig a ra *An Alarc'h Embannadurioù* ul lodenn eus an destenn orin gant un droidigezh c'hallek savet gant Serj Pineau, azasaet ha nevesaet gantañ diouzh ret, ha skeudennaouet gant e dresadennoù. El levrenn gentañ-mañ, e stumm un albom bras ha kaer, ez eus anv eus "an ergerzhout hag ar c'henwerzh". Un doare efedus ha plijus, evit hor c'hempredidi, da adperc'hennañ hor glad sevenadurel. Teknel a-walc'h eo an destenn, ken ma raio an dud deuet hag ar grennarded o mad anezhi, kentoc'h eget ar vugale.

MBdB

Skrivagnerien,
gant Mikael Madeg,
Kêredol,
310 pajenn



Eus 37 skrivagner ez eus anv e levr diwezhañ Mikael Madeg. Brezhonegerien al lodenn vrasañ anezho, mui unan bennak eus Bro-Gembre ha Bro-Skos, dre m'en doa bet tro Mikael Madeg da zeskiñ kembraeg ha goueze-

leg Bro-Skos er broioù tramorse ha d'ober anaoudegezh gant barzhed ha barzhezded eno. 38 skrivagner pa lavarinn gwir, rak an aozer a oar lakaat ar gaoz warnañ e-unan kenkoulz all, hag amploc'h eget justoc'h : « Koulz

din skrivañ diwar-benn danvez a anavezan mat »... Dipitet e vo ar re a vije bet e ged eus studiadennoù pe evezhiadennoù lennegel en dastumad *Skrivagnerien*. N'a ket an aozer en tu hont da fazioù distagadur henna-henn peurvuiañ. Eus emgavioù ez eus anv neuze. Eus komerajoù kentoc'h a lavaro ar re a vez lemm o zouchenn... Plegoù mil anavezet abaoe m'eo krog an debron-skrivañ en oberour pulhañ a zo bet e Breizh a-holl viskoazh. N'eo ket Mikael Madeg an hini diwezhañ o c'hoarzhin goap outañ e-unan ! Un digarez da bismigañ nep piv bennak all hep diskouez re a zislealded. Teodadoù a dapoevelato, ma n'eo ket bazhadoù, gant darn eus ar skrivagnerien en deus dantet kriz pe grisoc'h. Hiroc'h o fater gant lod. Abanna da skouer, a bak e begement... Kalz dinoasoc'h ar c'hrabisadennoù gant lod all : Ronan Huon en o zouez, unan e vag Mikael Madeg doujañs outañ gant ar feal hag ar pennek ma veze « o kas war-raok *Al Liamm*, ingal Doue ». Met « a-fet e skridoù e-unan 'vat, e oa pell 'oa o c'haven re simpl, reudik zoken [...] ». Erfin, ral a skrivagnerien a zo diouzh e

c'hrad... Yves Miossec ha Mab an Dig a zo e-touez an *happy few*-se.

Da be vat ur seurt levr, a-barzh fin ar gont ? Evidon-me, lenner ranell ha divalis ac'hanon, e rankan anzav em eus kavet gras o splujañ en tabutoù familh-se. Fentus hag hegasus, souezhus ha randonus, bourrus ha mantrus... Ul levr buhezek ma 'z eus. Lec'h ma vez buhez e vez sach-blev, kea ? Met ar pep dedennusañ e voe ober anaoudegezh, dre hanterouriezh Mikael Madeg, gant kalzik skrivagnerien am boa lennet o levrioù hep lakaat na dremm war o anv na kig war o eskern : Visant Seite, Yves Miossec, Mab an Dig, Visant Fave, Koulizh Kedez, an Tad Medar, Remi Derrien, Maria Prat hag Alan Heusaf zoken ! Brudailhoù diwar-c'horre pe ditouroù kentelius ? Da bep hini d'ober e soñj. Un testeni n'eo ken, met un testeni eo.

Evit prenañ al levr, kit e darempred gant an aozer dre bostel : mikael.madeg.keredol@orange.fr

MBdB

Al laou zo deuet en-dro !,
gant Katell Chantreau,
Keit Vimp Bev,
46 pajenn, 5€



N'ouzon ket ha spontañ a raec'h en-bihan pa veze anv eus ar Barbaou, ar pezh zo sur eo ec'h anavezan meur a dad ha meur a vamm hag a spont pa glevont ar ger : laou. N'eus ket nemeur ha na grogfe da skrabañ o fenn kerkent ha lavaret. Diwal-lit eta rak al laou zo deuet en-dro ha ne hañvalont ket bezañ e-sell

da guitaat pennoù ar re yaouank ken aes-se. A bep seurt a vo lakaet war o fennoù betek traoù kimiek, netra d'ober ! Ma ra Olwenn hag Aziliz o soñj mont da welet Rouanez al laou evit en em zizober diouzh he sujidi. Ur gontadenn fentus eo he deus savet Katell Chantreau.

SC

Beaj Lakvern,
gant Ewen Jacq-Perrot,
Keit Vimp Bev,
34 fajenn, 6€



Un diouganer yaouank eo Lakvern. E deroù an danevell e krog gant ur veaj hag a gaso anezhañ a Heklev da Heklev


war hent ar brezel. Ewen Jacq-Perrot a ginnig ur skrid gouron-faltazi savet mat. En un tenn em eus lennet e zanevell, daoust ma

oan lakaet diaes er penn kentañ gant deskrivadurioù dafar an diouganerien, ket muioc'h avat eget en ur lenn labour *Agrippa* pe traoù diwar-benn ar c'habal. Rannet eo ar skrid etre ar

pennadoù displegañ-se ha danevell beaj Lakvern. Kempouez eo avat. Aliañ a ran al levr-se d'ar re a vourr, evel don, seurt lennegezh.

SC

Dousig tad-kozh,
gant Myriam Guillevic,
Keit Vimp Bev,
32 bajenn, 5€




N'eo ket Matilda evit krediñ ar pezh he deus klevet : he zad-kozh en deus un dousig ! An dra-se n'a ket. Re gozh eo. Hag ur bern goulennoù a zeu war spered ar plac'hig. Enkrezet eo pa rank mont da weladenniñ he zad-kozh hag an dousig-se. Skrivet mat-tre eo an danevell-mañ. Fent ha teneridigezh zo

evit lakaat ar gaoz war ar marv, ar garantez, an oad. Diskouezet he devoa Myriam Guillevic bezañ ampart en he danevell gent (*Priñsez Marianna*, gw. war lec'hienn *Al Liamm* niv. 410), kadarnaet eo gant *Dousig tad-kozh*. Sed ur skrivagnerez a-zoare evit ar vugale.

SC

Paotr Louarn,
2. Roll pennañ,
gant Laurent Lefeuvre,
brezhoneg gant Camille
Argouarc'h,
Keit Vimp Bev,
52 bajenn, 8€




Gortozet e oa eil levrenn troioù-kaer gourharoz Breizh ken e oa. Er chabistr kentañ *Nozvezh al Louarn* e konte Laurent Lefeuvre penaos e tape Paol Salsedo e zrestgalloudoù. En eil chabistr-mañ e weler cheñchamantoù e temz-spered ar c'hrennard. Ul lampon goapaer e oa el levrenn gentañ ha tamm-ha-tamm en deus kemeret e roll war e chouk

a-zevri. Krog eo da soñjal evel ur gouron, unan hag a venn gwellaat an traoù ha gwareziñ ar re wan. A-nebeudoù ivez e teu war-wel an hini a vo e enebour pennañ emichañs. Ur blijadur eo lenn ar c'homiks-mañ. Anzav a ran ez eo dudius ivez lenn ar pajennoù e liv war ar gelaouenn Louarnig. Buhez hir da Paotr Louarn !

SC

Spont bras Mouchig,
gant Laurence Lavrand,
Keit Vimp Bev,
36 pajenn, 5€



Ur rakoun eo Mouchig hag en e diegezh e rank pep hini d'e dro mont da gerc'hat boued evit

an holl. Un deiz e lavar e vamm dezhañ mont da c'hrilheta. Ur rakoun spontik eo avat ha ne

gred ket mont pell. Ken spontik eo zoken m'en devo aon rak e skeudenn en dour. Ur gontadenn evit lakaat ar vugale da gompren e rank pep hini anezhe, erruet d'un oad zo, reiñ dorn d'o zud evit ober war-dro an ti, kavout o zu war o spont ha kement-se

**Milio hag ar
viziterien noz,
gant Annie Coz,
Skol Vreizh,
116 pajenn, 10€**

Sed ul levrig plijus evit ar rakkrennarded. Ur seurt enklask polis kaset da benn gant Milio, ar skoliad yaouank, hag e vignoned, gant skoazell un den a zo brud fall pe falloc'h warnañ e kêr. Milio a zo o paouez dilojañ. Ha setu eñ en ur gêr vihan war vord ar mor e Breizh. Kollet en deus e vignoned hag e rank deskiñ skoulmañ liammoù nevez. Merzout a ra un iskis a vonedone dirak poubellennoù ar c'harter, dres e-tal e gambr. Ur c'hrennard eus ar vro a zo

evit deskiñ ren o buhez pa vint bras hag aet kuit eus ar gêr. Mat eo ar skrid goude ma vefe dav ober un tamm divankañ ouzhpenn evit skarzhañ fazioù ha vioù-koukou.

SC



marvet n'eus ket pell gant re a zramm...


Annie Coz a zo anavezet mat bremañ evit he danevelloù tener ha subtil (*Bili er mor...*). Embannet int bet gant *Skol Vreizh*, *Aber*, *Al Liamm*... Ar wech-mañ e kinnig deomp ur romant berr evit al lennerien yaouank. Adkavout a reer perzhioù mat he skritur : eeunded, gwirionez, denelezh. Re fur ar bugel ha re sioul ar vuhez familh d'ar c'hentañ sell, met da ziwall zo... Diwar an dour red, gwall ebet, diwar an

dour skoilh, gwall d'an holl !
Kemer a ra harp Annie Coz war
dilojadeg ar bugel evit lakaat
war-wel pouez ar raksoñjoù
a-zivout an dud disheñvel,

arlezidi anezho, ha dreist-holl ar
freuz hag ar reuz degaset gant
an drammoù, a vez intret ganto
kement lise zo hiziv an deiz...

MBdB

**Le monde des
anciens Celtes,**
gant Venceslas Kruta,
Yoran Embanner,
400 pajenn, 19€



Rener a studioù *emeritus* eus
an EPHS (*Ecole Pratique des
Hautes études* - Skol bleustrek
ar studioù uhel) Pariz eo Ven-
ceslas Kruta. Unan eus ar ouizi-
eien varrekañ a-zivout istor ar
Gelted eo. Stumm kentañ al
levr-mañ a oa bet embannet un
40 vloaz zo. Adwelet eo bet,

kresket an destenn ha pinvi-
dikaet ar skeudennaouiñ. Krog
eo Yoran embanner da reiñ da
neb a vez dedennet gant istor ar
Gelted hep bezañ un arbenni-
gour, un toullad binvioù
a-feson.

HL

**La civilisation celtique &
Les fêtes celtiques,**
gant Françoise Le Roux ha
Christian-J. Guyonvarc'h,
Yoran embanner,
254 fajenn, 18€
246 pajenn, 15€



Klokaat a ra an daou levr-mañ levr Venceslas Kruta. Gwellet int evel levrioù “diazeez” war an dachenn. Embannet e oa bet *La civilisation celtique* evit ar wech kentañ e 1978 gant ar gelaouenn *Ogam*. Kalz o deus soñj eus embannadur *Ouest-France* e 1990. Mat eo adembann an oberenn eta. Pinvidikaet eo bet gant ur roll-gerioù talvoudus e fin al levr.

An eil levr a oa bet embannet gant *Ouest-France* e 1995. Reiñ a ra ur sell resisoc’h war Gouelioù ar Gelted o deus lezet kement a roudoù en hor c’hevredigezh. Ne ra ket droug kaout displegadennoù skiantel war *Samain*, *Belteine*, *Lugnasad* pe *Imbolc*... Evel an hini kentañ ez eo graet al levr-mañ evit tud ha n’int ket arbennigourien. Kavout a reer ur roll-gerioù er fin ivez.

HL



> Bremañ (406)

Gouestlet eo teuliad niverenn 406 Bremañ d'ar Vretoned e Bro-Sina. Yann-Vark Thorel a zo anavezet mat e bed al lennegezh evit e droidigezhioù diwar ar sinaeg pe c'hoazh ar rusianeg. Deskiñ a reer amañ eo dre ar c'han en doa gellet mont donoc'h e anaoudegezh ar sevenadur-se. Ma soñjfe da lod zo n'eus ket kalz darempredoù etre Sina ha Breizh, pe ne vefe

**Jerom OLIVRY &
Tudual HUON**

ket ken dedennet Sinaiz gant Breizh ha Breizhiz gant Sina... Deskit 'ta ez eus bet digoret e Shanghai ur Greizenn Sevenadurel Vreizhek ! Anaoudegezh a reer ivez gant Pêr Tangi, o labourat evit un embregerezh alaman e Shanghai... komzoù dastumet en ur preti e Shanghai anvet *La Crêperie* !

El lodenn *Soñj & disoñj* e lenner ur pennadig diwar-benn un niverenn eus *Bremañ* embannet 30 vloaz zo. 63% eus ar Vretoned a oa evit adunvanidigezh Breizh ! Petra zo c'hoarvezet p'emañ c'hoazh hor bro e daou damm ?

N'eus netra skianteloc'h ! a zo ur gronikenn nevez gant Tangi Legavre. Nevez zo eo bet

priziet levr Paskal an Intañv, *Udora, pe afer an ed-du*, e Prizioù France3 Breizh hag Ofis Publik ar Brezhoneg. En e levr eo bet dilezet hon Douar gant Mab-den... met ne chom ket “didud” pa vez euzhviled liesbrec’hek o vevañ aze. Ha ma ne vefe ket ken diskiant-se ?

E *Bremañ er bed* e lenner keloù a bep seurt : Korsika ha Martinik renet gant dizalc’hourien, Aurore Martin (bet kon-daonet gant Stad Spagn) ne chomo ket en toull-bac’h, pe c’hoazh kentañ ministrez Norzh-Iwerzhon, nevez titlet d’ar post-se, hag a daol plouz war an tan en ur zisklêriañ ne vo ket hi gwelet e kounlid Emsavadeg Pask (100 vloaz e 2016) en abeg ma oa, eviti, an emsavadeg-se « un argadenn a-enep an demokratelezh »... « Ar bed a dro, a dro... » a gane Jakez ar Borgn...

Brezelioù a zo er bed, hag a zo bet a-viskoazh... El lodenn *Anavezout ar bed* ez eus kaoz eus ur vro “yaouank” : Jorjia. Dizalc’h abaoe 1991, n’eo ket bet aes evit kement-se buhez ar Jorjiz pa ’z int bet skoet gant meur a vrezel diabarzh.

Dilennadegoù Turkia e miz Du 2015 a zo bet heuliet pizh gant meur a aozadur evit ensellañ

anezhe, en abeg d’an aergelc’h a ren er vro-se. Nil Caouissin a oa en o zouez ha reiñ a ra deomp e soñj war an darvoud-se, kement ha war ar Stad Turk.

El lodenn *Bevañ e Breizh* ez eus kaoz eus Albert Poulain, konter mil anavezet a Vreizh-Uhel, aet da Anaon e miz Here 2015. Hag er bajenn *Bevañ e brezhoneg* e lenner daou bennadig gouestlet da Herri ar Borgn, hag a zo aet en tu all ivez e miz Gwengolo 2015.

El lodenn *Levrioù, arzoù, embann* ez eus kaoz eus al lennegezh er skingomz. Kinniget e vez d’al lenner meur a abadenn gouestlet d’al lennegezh vrezhonek.

Sonerezh, sinema, c’hoarioù... Sed aze al lodenn a ra anv eus ar film nevez-savet gant Pascale Breton : *Suite armoricaine*. Ur film faltazi hir e galleg met n’eo ket dister plas ar brezhoneg en istor.


El lodenn *Sportoù & yec’hed* e lenner ur pennad diwar-benn beaj bamus Anton Kler-Châtelier hag en doa kemeret perzh en ur regata a-dreuz pleg-mor Gwaskogn. Peadra da gaout muioc’h a zoujañs evit hon endro...

Evel kustum ec'h echu an niverenn gant un nebeud keleier

a-zivout ar gouelioù aozet er vro ha rekipecoù evit ar re lipous !

JO

> Hor yezh (284)



Marie Beg-araok ha Chanson an disput entre Jean Louis ha Marivonne. Div ganaouenn tennet eus kaier Mathurine Philippe, kinniget deomp gant Erwan Le Pipec. Ne ouezer ket ez-resis gant piv eo bet skrivet an hini gentañ, an eil avat a zo bet skrivet gant Jean-Louis Guyader.

Goude-se ec'h adkaver pevara lodenn ur studiaden savet gant Herve Bihan war an henvrezhoneg hag ar c'hrennvrezhoneg. Ar skouerioù kinniget

d'al lenner a zo diwar tri kartular disheñvel (hini Landevenneg, Kemperle ha Kemper). Diskouez a reont deomp, eme Herve Bihan, penaos e oa an darempred etre yezh ur gevredigezh, ar brezhoneg, hag ur yezh boutin da gement kevredior en Europa (ha moarvat pelloc'h) al latin.

Kinnig a ra Herve Bihan un diell eus ar bloavezh 1927 ivez : *Gwerz war taol louz Begard* : daou veleg a oa bet kondaonet evit maboriadezh. Goude ar werz skrivet gant Charlez Rolland (1862- 1940) ez eus un nebeud pennadoù bet embannet d'ar mare-se er c'helaouennoù.

Penaos sevel gerioù nevez azas ha kaer ? Fulup Lannuzel en deus savet ur pennad hir war ar goveliañ gerioù nevez... Daoust hag e ranker derc'hel d'ar gerioù etrebroadel, evel ma kinnige Roparz Hemon evit danvezioù zo (an ekonomiezh, ar ouiziegezh, ar filozofiezh), pe goveliañ gerioù nevez ? A-hed ar bloavezhioù ez eus bet tud o prederiañ war an dachenn-se : Vallée, Meven Mordiern hag Emil Ernod da gentañ, *Preder*

ha Guy Etienne, kreizenn ar geriaouiñ (*Diwan*), *TermBret* (kreizenn termenadurezh Ofis ar Brezhoneg) goude-se. Soñjal a ra F. Lannuzel eo doareoù *Preder* ar re gempoellañ met ivez an hini a c'houlenn ar striv brasañ a-berzh ar vezher.

Dielfennañ a ra F. Lannuzel
un nebeud termenou (grafour/
kevregour-produiñ/kenderc'hañ

> Imbourc'h (92)

– ekonomiezh/armerzh, da skouer) evit diskouez tuioù mat pe fall an hentennoù implijet ha reiñ a ra aozer ar pennad e ali en ur lavarout perak en deus graet an dibab-mañ-dibab.

En niverenn-mañ emañ roll
ar pennadoù embannet en *Hor
Yezh* e 2015.

TH

Pariz en doa goulennet e vije implijet an ilizoù disimplij evel moskeennoù, eus mennozhioù nevez Michel Onfray, ar prederour gall, eus ar repuidi oc'h “aloubiñ” Europa, ar Stad Islamek.

Hep tiegezh brezhonek, brezhoneg ebet, pennad savet gant Tepod Gwilhmod. « Ur yezh a vez desket en ur familh, da gentañ holl. Ret eo gwiadañ darempredoù etre ar familhoù brezhonek ma teuio ar yezh da vezañ ur benveg naturel a zarempredoù, » emezañ. Ouzhpennañ a ra e « rankomp treiñ kein a-grenn ouzh ar patrom gall ha frankvasonek a zo evit diskar ar familh evel ensavadur ».

Echuiñ a ra e bennad en ur lavaret kement-mañ : « Ret eo din anzav ez eo gwall vresk



Serr-noz war ar bed kozh,
pennad savet gant Donval
Gwenvenez. Anv zo gantañ eus
niver ar gristenien o koazhañ
hag hini ar Vuzulmiz o kreskiñ,
eus kinnig rektor moskeenn

Emglev an Tiegezhioù hag en em c'houlenneran perak ez eus ken nebeut a dud e Breizh a fell dezho sevel liammoù etre o ziegezhioù d'o sikour da ober er gêr gant ar yezh, e karantez Doue hag ar Vro ».

Gant Tepod Gwilhmod ez eus ur pennad all diwar-benn troidigezh ar bibl santel. Lenn a

c'heller al labour bet graet war : <https://emglev.wordpress.com/bodad-ar-bibl-santel>.

Youenn Troal en deus skrivet ur pennad : *Ha bez' ez out-te an hini a zle dont ?*

Notennoù diwar an darvoudoù a zo bet skrivet gant Yann Maneguen.

TH

> Peuple Breton (624)



Ouzhpenn 13 pajennad eus ar gelaouenn a zo bet gouestlet d'an dilennadegoù Rannvro. Hag ar pennad kentañ a c'heller lenn a zo diwar zorn Jean-Christophe Angelini, kadoriad strollad broadel Korsika (PNC)

pa oa aet ar maout gant listenn ar C'henemglev Broadelour e Korsika. Kaoz zo ivez eus an dilennadegoù e Breizh, e Okitania, en Elzas. Lakaet ez eus bet splann en dilennadegoù-se pegen stank e oa niver an dud a oa chomet hep votiñ. Gael Briand a zispleg ivez e vije bet disheñvel mat an disoc'hoù ma vije bet ur vouezhiadeg kenfeuriek.

Ur pennad hir ha titouret mat a zo gant Georges Lefeuve war ar brezel didermen en Afghanistan. Na Kaboul nag Islambad n'int mestr war an dachenn ken ha n'eo ket en ur ren ur brezel drastus e vo kemmet tra pe dra.

El lodenn vrezhonek e kinnig Maxime Touzé deomp ur pennad war ar bombezadegoù e Siria. Votet e oa bet gant Kambr ar c'humunioù breizhveuriat an

aotre da vont da vombezañ *Daech* e Siria. Kannaded an *SNP* e Skos ha re *Plaid Cymru* e Kembre o doa votet a-enep rak evito e vo dister efed ar bombezadegoù-se ha diskoulmoù all a zo da lakaat e pleustr. Lavarout a ra M. Touzé ez eo ar bobl e Breizh-Veur enep seurt diviz rak ne fell ket d'an dud kaout ur brezel evel hini Irak. Diwar-se eo kresket brud an *SNP* hag ar *Plaid*. Ouzhpenn-se ez eus bet tabutoù ur bern war ar mediaoù peurgetket, ar pezh n'eo ket c'hoarvezet e Bro-C'hall.

Gant Nil Caouissin ez eus ur pennad war an dilennadegoù Rannvro. Daoust ha gwelout a rimp un emrenour e penn ar Rannvro un deiz bennak ?

Gant Paol ar Meur ez eus kaoz eus Gasterezh. « Pa vez roet da c'houzout efedoù drastus ar gasterezh war spered ar maouezed, hag an nebeud a

baotred aet war ar vicher-se, e komprenet e c'heller ober torfedourien gant al lezenn eus ar pratikoù, » eme P. ar Meur. Estreget en Naoned eo dister ar gasterezh er straedoù e Breizh.

En e bennad *Du ha gwenn ha plas da lenn* ez eus kaoz gant Herve Lannuzel eus pevar levr nevez embannet e brezhoneg : *Bugel ar glav* gant Mai Ewen (*Keit Vimp Bev*). Ur skrid bet embannet war niverenn 407 *Al Liamm* eo ar skrid-se. *Diskrap e Skrabyar* gant Yann Gerven (*Al Liamm*), *Poltred Dorian Gray* gant Oscar Wilde (*An Alarc'h embannadurioù*) ha lakaet e brezhoneg gant Alan Martel ; *Kleier an Trec'h* gant Youenn Gwernig (*Al Liamm*). Lenn a c'heller ivez rentañ-kont Morgan Tremel war niverenn 413 *Al Liamm*.

TH

> **Pajennoù Breizh (40)**

Lenn a c'heller, e brezhoneg, ur pennad-kaoz gant Sylvie Bruna, krouerez an ti-embann *Numéribulle* staliet e Brest. Gant Tugdual Carluer eo bet savet ar pennad. E miz Kerzu 2014 e oa bet roet lañs d'an ti-embann-se

hag an arload niverel a oa bet krouet e miz Mae 2015. Evit poent e vez embannet levrioù divyezhek en daou stumm : niverel ha war baper. An istorioù nevez embannet ganto a zo krouidigezhioù penn-da-benn. Klask a ra an ti-embann tizhout bugale ar skolioù divyezhek



dreist-holl. Istorioù Maiwenn Morvan a ra berzh ken-ken. Adwelet e vez ar skrid brezhoneg gant *Ofis Publik ar brezhoneg* ha kinniget e vez, evit ar re yaouankañ, un destenn enrollet, dezho da dapout an distagadur reizh. Gant *Dizale* e vez kaset al labour-se da benn. Evit ar c'houlz n'eus bet embannet netra all estreget levrioù galleg-brezhoneg met gant ar soñj emaint ledanaat an dachenn war-zu Ar Reunion, Gwadeloup, Korsika, Bro-Vask, Elzas. A-drugarez d'ar stal *ID31* e Brest o deus gelllet kinnig ul lec'hienn gaer. An arload a c'heller pellgargañ digoust war lec'hienn *Numéribulle*.

Teuliad an niverenn 40 a zo gouestlet d'ar pezh a ra al

levraouegoù evit kinnig peadra da lenn d'an dud o devez poan o lenn. E kêr Luisterpunt e Bro-Flandrez ez eus bet lakaet e pleustr abaoe pell un doare nevez da labourat, da ginnig levrioù (komenad Daisy) ha da labourat a-gevret gant tud a vicher a oar diouzh kudennoù al lenn e-touez ar re yaouank hag ar re goshoc'h. Diwar skouer Kebeg ha broioù an Norzh ez eus bet krouet *Facile à lire* e lod eus levraouegoù Bro-C'hall. Roet ez eus bet ar gaoz ivez d'an dud e karg eus levraouegoù Lesneven, Landerne, Landivizio, Lambaol-Gwimilio, Sant-Brieg.

TH

> Bro Nevez (135)



Lois Kuter, pennkazetenner e ar c'hannadig (*Newsletter*), he deus skrivet ur pennad hir ha titouret mat e saozneg diwar-benn stad ar brezhoneg hiziv an deiz. « *While one counted 1 million Breton speakers at the beginning of the 20th century the number of speakers today comes to 200,000 people. It has thus been divided by five in 100 years and this catastrophe continues,* » emezi evit kregiñ gant he fennad. Displegañ a ra er pennad-se an diskoulmoù a ranker kaout evit mont war-raok ha gwellaat stad ar yezh en hor bro.

Renabliñ a ra ivez al levrioù bet embannet e Breizh. Hini Alan Coraud da skouer : *Sauvons le Muscadet d'une mort programmée* embannet gant Yoran Embanner, pe geriadurig Ken George : *Gerlyver Poket Kernewek/Sowsnek - Sowsnek/Kernewek* (Yoran Embanner).


Adkavout a reer roll an dud bet erminiget e 2015 : Patrick Marechal, Philippe Argouarc'h, Eugène Riguidel hag Yvon Palamour ; Pierre-Yves Rhun.

En e bennad *Deep inside a Breton Skull* e kinnig, Jean-Pierre Le Mat, war don ar fent, un doare nevez da gomz brezhoneg e saozneg : lavarit « *Put your shoes in your feet* » (lak' da votoù en da dreid) kentoc'h eget « *Put your feet in your shoes* » da skouer. Ur bern troiennoù fentus all a ginnig d'ar saoznegerien evel ma oa bet graet ur c'houlz zo bet e galleg gant al levr : *Sky ! my husband* (ciel ! Mon mari).

Bez' e c'heller kaout *Bro Nevez* e stumm PDF en ur skrivañ da Lois Kuter : loiskuter@verizon.net

TH

> Div yezh magazine (67)



Div yezh Breizh a bled gant ar c'helenn brezhoneg er skolioù publik. *Divyezhek* eo ar gelaouenn hag e liv penn-da-benn. Ar ger stur en-dro-mañ a zo : Kenober.

Daou brezidant nevez a zo bet anvet : Frédérique Mouden ha Remi Toulhoat. Kaoz a zo er gelaouenn eus an emglev a oa bet evit treuzkas yezhoù Breizh er gevat steuñv Stad/Rannvro 2015-2020.

Daoust d'an nebeud a youl evit kreskiñ niver ar postoù kelennerien ez eus bet graet araokadennoù : n'eus bevenn ebet ken evit digeriñ un hentad

divyezhek. Kresket e vo an niver a blasoù digor er genstrivadeg divyezhek hag aesaet an ehanoù gouestlet d'ar stummañ evit ar gelennerien unyezhek c'hoant ganto da zeskiñ brezhoneg evit mont war bostoù divyezhek goude-se.

Anv zo ivez eus *Gweneg*, ur savenn arc'hantaouiñ a-stroll gwriziennet e Bruz. Ar pal a zo diorren ar vro dre arc'hantaouiñ raktresoù tud, kevredigezhioù hag embregerezhioù er vro.

Bazhvalan a zo un ostilh etreoberiat lakaet enlinenn gant *Bretagne Culture Diversité* ha gantañ e c'hell ar skolioù, tud ar vugale mont e darempred gant treuzkaserien sevenadurel. Didorr eo klask ur bazhvalan gant un nebeud likoù war ur gartenn etreoberiat. <http://bcd.bzh/actions/passeur-de-culture>.

Keleier an embann a c'heller lenn ivez : an ti embann *Ker Java* en doa embannet ul levr teiryezhek war al lec'hanvadurezh : *Mona o klask e hent* ha setu ma kinnigont bremañ un diskouezadeg gant an hevelep pal : displegañ an anvioù-lec'h d'ar vugale. Staliet e vo e miz C'hwevrer e Roazhon hag e miz Meurzh e Bro ar Roue Morvan.

Lenn a c'heller ivez ur ganaouenn evit ar vugale, *Gwilhou ar bleiz* a c'heller selaou war lec'hienn dielloù *Dastum* ; ur meuz da aozañ, ur gentel vrezhonek ha renabl un nebeud levrioù evit ar vugale :

> Breizh da zont (521)



Daou bennad e brezhoneg a c'heller lenn er c'hannadig-se (8 pajenn) skrivet gant Yann Duchet. Anv zo gantañ eus daou levr nevez embannet gant *Aber*. *Kevrin ha marvailhoù*, un dastumad skridoù bet embannet da gentañ er gelaouenn *Gwalarn*. Skridoù gant Hoffman, Boccaccio (*Decamerone*) lakaet e bre-

Spered an tour-tan skrivet gant Goulc'han Kervella hag embannet gant *Beluga-Coop Breizh*. *Skeudennaoueg Arzhig Du* (saozneg ha brezhoneg) embannet gant *Bannoù-heol*.

TH

zhoneg gant Alan Brenn (anv-pluenn Roparz Hemon tro ar bloavezhioù tregont). Lenn a c'heller ivez en dastumad-se *Ar marv evit Breizh*, deroù ur romant diechu gant Alan Brenn. *Aber* en deus embannet ivez *Laeoù Marie de France*, aozet gant Pierrette Kermaol, Roparz Hemon ha Yeun ar Gow.

Thierry Jigourel en deus gouestlet ur bajennad a-bezh d'ul levr bet skrivet gant Jakeza le Lay : *Le Parnasse breton (L'Harmattan)*. Un diverrañ eo eus an dezenn he doa-hi savet. Al luskad-se a oa bet kaset en-dro da gentañ penn e 1889 gant Louis Tiercelin hag ar sonaozour Joseph-Guy Ropartz. Lakaet o doa embann un antologiezh barzhonegoù skrivet gant 96 skrivagner.

Buhezskrid Yann Fouere a zo bet aozet e teir yezh : saozneg, brezhoneg ha galleg. Gant Yann Duchet eo bet aozet an droi-

digezh e brezhoneg. Embannet gant *La Fondation Yann Fouéré*.

E galleg ez eus pennadoù diwar-benn trec'h ar vroadelourien e Korsika (Thierry Jigourel, Bertrand Deléon, Yves-François Le Coadic) hag an endro hag ar *COP 21* gant Gwenaél Kaodan. Petra eo an emglev-se a zo bet

etre ar broioù er *COP 21* ? N'eus bet lavaret ger ebet war ur gudenn a bouez : kresk ar boblañs er bed da skouer. Emglevioù lec'hel a vije bet emsavoc'h rak tro he dije bet ar boblañs da gemer divizoù ha da reiñ he ali.

TH

NOTENNOÙ



Annaig KERVELLA
Tudual HUON

HOR MIGNONED

Kañv :

Aet eo mamm Gwenole Bihannig, Paola Gruieg Bihannig da Anaon d'ar 1^{añ} a viz Kerzu 2015. Lidet 'oa bet hec'h obidoù e iliz Sant Frañsez e Sant-Maloù.

Desket hon eus gant glac'har e oa aet Noela Olier, intañvez Alan Louarn, da Anaon d'ar 25 a viz Genver 2016 e Roazhon d'an oad a 89 bloaz.

Koumananterez feal d'*Al Liamm* e oa. Ur stourmerez kalonek hag ur vaouez leun a nerzh hag a zouster. Ganet he deus bet dek a vugale : Tangi, Malo, Lena, Nolwenn, Riwall, Goulven, Katell, Gwennael, Tremeur ha Kristell, kalz anezho mignonned da skipailh *Al Liamm*.

Kas a reomp hor gourc'hemennoù a gengañv d'he bugale, bugale-gaer, bugale-vihan ha bugale-guñv.

Lidet eo bet hec'h obidoù d'an 28 a viz Genver en iliz Sant-Stefan e Roazhon, douaret eo bet e bered Kermabon e Gwaien.

Ra vo skañv dezhi douar Breizh, ar vro a gare kement.

Aet eo da Anaon Marion Gunn, ezel eus *Skourr Iwerzhon ar c'hendalc'h Keltiek*. Embannet he doa ur c'heriaouegig

c’hwec’hvezhek un toullad bloavezhioù zo evit lakaat war-wel ar yezhoù keltiek.

Aet eo da Anaon Yvonne Bocher, merc’h Aogust Bôcher “ar Yeoded”. Skrivet he doa buhezskrid he zad (e galleg) en ul levr barzhonegoù e brezhoneg gant “ar Yeoded” : *Bleunioù yaouankiz II* embannet e ti *Celtics Chadenn* e 2003. Douaret eo bet e Sant-Servez.

Postel digant Fulup Lannuzel :

« Gouezet em eus en ur lenn niverenn diwezhañ *Al Liamm* e oa marvet Andreu Gelleg. Tro am boa da heuilhañ kentelioù brezhonek aozet e Ker Vreizh e Paris e 1969-70. Soñj em eus e oa bet studiet *Santez Dahud* gant Roparz Hemon, ha pegen dedennus ha plijus e oa-eñ evel kelenner, aketus-kenañ war an distagadur (distagañ ar japel (chapel) da skouer). P’edon oc’h ober un D.E.A. war romant Roparz Hemon *Mari-Vorgan*, em boa klevet anv eus e entan evit al laboused eus an arvor hag eus e c’hoant da embann ul levr war se... Euver eo ivez n’en defe ket skrivet muioc’h e brezhoneg. »

Ganedigezh

Laouen eo Gael Pedron ha Dewi Siberil o kemenn deoc’h ganedigezh o mab Eflamm d’an 29 a viz Gwengolo 2015 e Lannuon. Yac’h-pesk an hini eo ha lakaet en deus a-stlabez buhez pemdez e gerent !

PROFOÙ _____

Miz Kerzu : Ronan AN HENAFF ; Jean-Yves ALLAIN ; Gaod ZWINGENBERGER ; Fulub KADORED ; Eric PIANEZZA-AR PACH ; Erwan JEUSSET ; Jañ-Mai DRAPIER ; Patrick CADOREL ; Gildas LE BIHAN ; Evelyne RAOUL-GUILLAUMIE ; Michel LE

HIR ; Daniel PETON ; Yannig AUDRAN ; Christian ROGEL ; Yann VERNEY ; Christian LE GOFF ; Louis BODIVIT ; Lukian KERGOAT ; Bernez KADORED ; Jean FUZELLIER ; Yann AN AOD ; Hervé RENAN ; Madalen AN AMOUR-LE GUILLARD ; OUESTELIO

War un dro : 1086€

Miz Genver : Gireg & Marivon KONAN ; Pierig AN DIGERC'HER ; Didier AR BELLER ; Jean-Pierre FOUILLE ; Gwenole BIHANNIG ; Gwenael EMELYANOFF ; Ivon AR GAG ; Daniel KERNALEGENN ; Herve CORBEL ; Yann-Fañch BURLOT ; Bernez TANGI ; Anton FITAMANT ; PAOL. & M.-T. CALVEZ ; Jorj BELZ ; Jef GEDEZ ; Huguette GAUDART ; Gweltaz OMNES ; Fañch PERU ; Erwan CONNAN ; Roland MOGN

War un dro : 450€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

WIKIMEDIA HA YEZHOUÛ FRAÑS

Aozet ez eus bet un devezh-studi gant *Wikimedia Frañs* hag an DGLFLF (*Délégation générale à la langue française et aux langues de France*) e Pariz d'an 23 a viz Genver 2016. Unan eus ar palioù a oa kinnig *Wikipedia* hag ar pezh a c'hell degas da yezhoù “rannvroel” Frañs.

Digoret e voe an devezh gant eil dileuriad an DGLFLF, Jean-François Baldi. Goude e voe un eskemm war al leurenn etre renerez an OLCA (*Office pour la langue et la culture alsaciennes*), rener Lo CRIDOC (*Centre interrégional de développement de l'occitan*) ha rener *Congrès permanent de la langue occitane*.

Goude kreisteiz e voe kinniget *Wikipedia* hag an doareoù da gemer perzh er raktres, ar *Wikitionnaire* (bez ez eus eus *Wikiriadur*

e brezhoneg) hag ar raktres enrolladennoù evit lakaat da glevet ar yezhoù a zo gant *Wikipedia*.

Ne oa ket gwall niverus ar berzhidi met dedennus 'oa an traoù. Den eus Korsika nag eus ar broioù tramor. Kaset 'oa bet un dileuriad gant BCD-Sevenadurioù. Un nebeud brezhonegerien hag ur gallaoueger a oa aze en o anv personel. Domaj eo ne vije bet gwelet liv nag eus an *Ofis* nag eus ar Skol-Veur e seurt emgav.

Pouezus eo *Wikipedia* en hor bed. Pouezus eo e kemerfe ar brezhoneg e blas ennañ rak ur benveg diorren dispar eo. Un nebeud tud a labour a-zevri evit *Wikipedia* e brezhoneg. A-drugarez dezho e oa bet kontet 56 908 pennad ennañ d'ar 24 a viz Genver da 11e noz. Ne nac'her sikour ebet war *Wikipedia*, ma vefe muioc'h a dud o kemer perzh – digor d'an holl a youl vat – e c'hellfe *Wikipedia* e brezhoneg tizhout 100 000 pennad, 200 000... N'hellfe den paouez al lañs.

DIVANKADENNOÙ

Fazioù a zo chomet en danevell *En ur lenn deizlevr Even dindan guzh* skrivet gant Malo Bouëssel du Bourg e niverenn 413 *Al Liamm*. Setu amañ an difaziadennoù :

1) pajenn 53 : d'an 14 a viz Mae (e-lec'h « d'an 12 a viz Mae »),

2) pajenn 54 : da boulligoù dizoñv (e-lec'h « da voullouigoù dizoñv » !!!, eus poulligoù pe poullou-boc'h ez eus anv, ha neket eus boullouigoù...),

3) pajenn 56 : astennet en deus... e zorn..... evitañ (e-lec'h « he zorn »). D'an 29 a viz Mae (e-lec'h « D'ar 29 a viz » hep anv ar miz),

4) An anvioù divoutin (da sk. *Game of throne*) n'int ket da vezañ lakaet e stumm lizherennoù stouet, rak al lizherennoù stouet a vez implijet en destenn-mañ evit merkañ soñjoù gwreg Even.

A-BERZH ROUDOUR : ANAVEZET AR BREZHONEG EVIT AR C’H/ KHS

Ez-ofisiel eo : Abaoe fin 2015 e c’hellit deskiñ brezhoneg gant ho Kont Hiniennel a Stummadur. Hiviziken emañ an Diplom Barregezh Yezh war ar rollad testeniekadurioù anavezet evit ar c’h/ KHS. Abaoe 2011 ez eus eus an diplom-se evit ar brezhoneg. An emstriverien a dap gantañ pep a live etre A2 ha C1, ul live diouzh ar skeul European evit ar yezhoù. Gant an Deskadurezh Stad eo aozet hag anavezet an diplom. Prientiñ anezhañ a c’hellit gant stummadurioù *Roudour*.

Skoazell a c’hellit kaout gant stummerien-kuzuliañ *Roudour*.

Stummadur hir *Roudour*

30 stajiad a zo bremañ oc’h heuliañ ar stummadur daoulamm 6 miz e Kemper, Karaez ha Montroulez (digoret gant kenlabour *KLT* e miz Gwengolo 2015). Bep sizhun e vez digoret an 3 stummadur deoc’h. Pa glot ar programm gant ho live e c’hellit kemer perzh er stummadur hir evit ur sizhun pe muioc’h ma fell deoc’h.

Stummadurioù nevez

Evit klotañ gant implij-amzer ha c’hoantoù pep hini e vez kinniget gant *Roudour* e 2016 :

Devezhioù dizoleiñ pe barrekaat war ar brezhoneg.

Stajoù 5 devezh dalc’het e-kerzh ar vakañsoù skol pe war ar bloaz.

Diouzh an dibab e vez kinniget hor stummadurioù ganeomp. Aozañ un hentad hiniennel a c’hellomp ober asambles ganeoc’h.

Evit gouzout hiroc’h : www.roudour.com

KOUMANANT DA YA ! ENLINENN

Skipailh ar gelaouenn *Ya !* a ginnig d’al lennerien koumanantiñ en ur mod niverel, dre treuzvankañ, evit 2,50€ ar miz kentoc’h eget 5,50€.

Bep Meurzh e vo kaset ar gazetenn dre Pdf d'ar goumananterien.

Titouroù, koumanantiñ : magali.kvb@orange.fr

KELAOUENNOÙ EN HEKLEV SEVENADUREL AL LIAMM _____

Lod koumananterien a gav eo un dipit ne vije ket ken eus lodenn *Kelaouennoù an Heklev sevenadurel* er gelaouenn baper. Pa rankemp moullañ ar follennoù-se e liv penn-da-benn e oa kresket a galz priz ar gelaouenn e ti ar mouller, en askont da se e oa bet divizet gant Skipailh *Al Liamm* lakaat al lodenn *Heklev sevenadurel* digor d'an holl war hol load. Dav eo pellgargañ *Heklev sevenadurel* an niverenn a c'hoantait lenn ha netra ouzhpenn. Evel-se e kavfot al lodenn *Kelaouennoù*.

PRIZIOÙ DAZONT AR BREZHONEG _____

D'ar Gwener 29 a viz Genver 2016 e oa aozet 19^{vet} lid meur ar Prizioù. Aozet e vezont gant *France3 Breizh* hag *Ofis Publik ar Brezhoneg*.

E sal An Avel Vor e Plougastell-Daoulaz e oa deuet forzhik a dud. Kaset e oa an abadenñ en-dro gant Goulwena an Henaff ha Yann-Herle Gourves. En-dro dezho e oa izili ar bodad-barn evel-just, loreidi zo o doa bet ar priz-se er bloavezhioù tremen, rener an abadennoù brezhoneg Mael Gwenneg, prezidantez Ofis Publik ar Brezhoneg, Lena Louarn. An aotrou maer Dominique Cap a oa e-touez ar sellerien.

Lusk a zo bet a-hed al lid gant Youn Kamm ha Bagad Penn ar Bed o deus sonet meur a don. Setu amañ an disoc'hoù :

Kevredigezhioù

- 1 Labourerien-douar Breizh**, a ra gant ar brezhoneg evit o c'hehentiñ.
- 2 ADEC 29**, Kevredigezh evit diguzhat ar c'hrign-bev e Penn-ar-Bed, evit bezañ embannet ur blegfollenn ditouriñ divyezhek.
- 3 AREP**, TGM bugaligoù e brezhoneg.

Levrioù faltazi

- 1 Udora pe afer an ed-du**, romant skiant-faltazi gant Paskal an Intañv, Emb. *Al Liamm*
- 2 N'eus ket a garantez eürus**, romant gant Goulc'han Kervella, Emb. *Skol Vreizh*
- 3 Divemor**, romant gant Pierre-Emmanuel Marais, Emb. *Al Liamm*

Strollegezhioù

- 1 CNFPT**, stummañ implijidi ar strollegezhioù war ar brezhoneg
- 2 Kumuniezh-kumunioù bro Kemperle**, evit he c'hannadig *Mag16* lakaet e brezhoneg penn-da-benn
- 3 Ti-kêr Pontekroaz**, en deus sikouret lakaat digeriñ ur skol Diwan

Kleweled

- 1 Kurdistan, Huñvreal an Nevez-amzer**, teulfilm (52') gant Mikael Baudu (produet gant *Gwengolo Filmoù*)
- 2 Enseller Panda**, heuliad filmoù bevaat gant Gilduin Couronné ha Sébastien Hivert (produet gant *JPL Films*).
- 3 Paotred al Loc'h**, teulfilm (28') gant Ronan Hirrien (produet gant *Frañs 3 Breizh*)

Embregerezhioù

- 1 NumériBulle**, istorioù evit ar vugale da bellgargañ diwar Internet
- 2 D'istribilh**, ur vreserezh hag he deus sachet ar vrud warni gant ur video e brezhoneg hag a zo bet gwelet ouzhpenn 100 000 gwech war Internet
- 3 Tachenn-gampiñ Kongell e Kiberen**, panellerezh divyezhek

Pladennoù kanet e brezhoneg

- 1 **Skeud o roudoù** gant Nolwenn Korbell (Emb. *Coop Breizh*)
- 2 **Heol Gor** gant Dañs er Jeko (produet ganto o-unan)
- 3 **Brein** gant Brein (produet ganto o-unan)

Brezhoneger(ez) ar bloaz

- 1 **Romain Sponnagel** evit bezañ roet lañs da gelenn ar brezhoneg ha da sevenadur Breizh e bro Sant-Brieg, hag evit bezañ krouet an arload *Stag*
- 2 **Krismenn** evit e stajoù kanañ hag e sonadeg war al leurenn vras en Erer Kozh
- 3 **Darlene Aroko**, ur plac'h eus Kenya hag a zo o teskiñ brezhoneg

Al loreidi gentañ o deus bet ur prof a 1 500€ digant *Ofis Publik ar Brezhoneg* en anv Kuzul-rannvro Breizh hag un oberenn arzel krouet gant ar poder-priajer Michel Le Gentil profet gant *France 3 Breizh*. Al loreidi erruet da eil ha da drede o deus bet peb a 500€.

Gellet o deus bet ar re zedennet heuliañ an abadenn war-eeun e *streaming*. Skignet eo bet an abadenn is-titlet d'ar Sul 31 a viz Genver ha d'al Lun e Liger-Atlantel hag en-dro war peurrest Breizh.

TAOL-KURUN 2016

Eus ar 14 betek an 31 a viz Genver e oa 22^{vet} *Taol Kurun* Bro-Gemperle o kas An Nerzh krouiñ en-dro. 16 kumun o deus kemeret perzh e stumm pe stumm : sonadegoù, filmoù, stalioù-labour ha dudi keginad, dañsal, deskiñ brezhoneg, c'hoariva, kontañ...

D'an 23 oa bet roet disoc'h Koñkour an Haiku e Levraoueg an Arzhanaou. Ar ger penn a oa AN AVEL. Hervez an aozerien eo 960 haiku eo a zo bet kaset dezho. En o zouez 60 e gallaoueg, 319 e brezhoneg ha 577 e galleg ha 6 e yezhoù all. 530 a dud o deus kemeret perzh, 11 skol ha 14 klasad.

3 haiku zo bet priziet e pep rummad. Er juri e kaved : Bernez Tangi, Alan Kervern, Mai Ewen, Malo Bouëssel du Bourg ha Rozenn Milin.

Rumm ar vugale

- 1- Digor eo ma frenestr/ an avel o kas ac'hanon/ betek an oabl !
Margaux, skol Diwan Banaleg
- 2- Tad-kozh ha mamm-gozh/ ar ganevedenn o tont/ avel ebet ken
Liam, skol Diwan Banaleg
- 3- War an draezhenn/ gant ma mantell gris/ ma sarpant o nijal
Yuna, skol Diwan Banaleg

Rumm ar grennarded

- 1- Sourradenn an avel/ dre un duellen vetoñs/ sonerezh ar chanter
Fañch, skolaj Diwan Ar Releg
- 2- Avel vor, avel viz/ o tegas blas ar bezhin/ d'ar martolod kozh
Youna, skolaj Diwan Ar Releg
- 3- Avel er maez/ ar pellgomzer o seniñ/ an nor o stakal
Gabriel, skolaj Diwan Ar Releg

Rumm an dud deuet

- 1- Kevnidenn n'he c'hastell/ luskellet gant an avel/ argad dantelezet
Annaig Kervella, Roazhon
- 2- Al loar a-drek koumoul/ delioù o treuziñ an hent/ krog eo ar fest-noz
Anne-Claire Even, Lannuon
- 3- Gwez derv kozh gleb/ ne chom war Gerampuilh/ 'met rock an avel
Milena Krebs, Kemperle

Dodenn ar c'hoñkour haiku evit 2017 a vo AN HENT.

ROLL PENNADOÙ 2015

75 PENNAD BET EMBANNET E 2015

(NIV. 408-413 : 620 PAJENN)

Ar pennadoù dre rummad

BARZHONEGOÙ

Va hud ha Dahud , gant Julia Bihannig Garcia	408/3
Dizolo , gant Ibrahim Kerghibran	408/6
Denelezh velkonius , gant Fañchig Gwenn	408/8
Er sioulder , gant Gwenn-Ael ar C'helleg	409/3
Ultramarina , gant Herve Maheo	409/4
Leper / Ypres - 1915 , gant Garmenig Ihuellou	409/6
Nepenn , gant Kervalan	410/3
Hunvreerez ar Pont , gant Pascal Tabuteau	410/5
Disput etre ar vrenigenn hag al lapous-mor , gant Yann-Reun Tangi	410/7
Glav a garan , gant Anne-Marie Quemper, troet gant Iwan Couée	410/9
Un dibab haiku , gant Mari-Soaz ar C'hozh, Stefan Carpentier, Mai-Ewen, Fanny Chauffin, Patrick Drean, Ólöf Pétursdóttir, Kirill, Malo Bouëssel du Bourg hag Annaig Kervella	412/5
Kleñved , gant Pascal Tabuteau	413/3
Eneberez , gant Fañchig Gwenn	413/5
Ur varzhoneg evit farsal , gant Julie Borisova	413/6

DANEVELLOÙ

Anjela hag he mamm , gant Mai-Ewen	408/10
Enezenn , gant Denez Dorso	408/20
Bruderezh, kerent ha mignoned , gant Yann Gerven	409/8
An deroù , gant Annie Coz	409/15
Moonrise Medical , gant Iwan ar Fur	409/23
Ar bromesa , gant Lan Tangi	409/34
Afer an unkorneg glas , gant Agustín Fernández Paz, troet gant Gwenael Emelyanoff	409/47
Yann-Bêr ar c'hontroller SNCF , gant Jil Penneg	410/11
AT333 , gant Yann Gerven	410/19

Un tarch melen , gant Paskal an Intañv.	410/29
Bastard , gant Kristian Braz.	410/44
Ra vin daonet mar ned a ket ar maout genin er c'hoñkour , gant Dominique Allain	410/55
Clearances , gant Alistair MacLeod, troet gant Kristian Braz.	412/54
An erv vili , gant Yann Guillamot	413/10
Hunvre ar re varv , gant Gael Briand.	413/12
Ruz an teod , gant Bocquenet-Carle Jeanne	413/15
Cork-Pariz , gant Bettina.	413/17
Requiem an dizesper , gant Yann Deskard	413/19
Ti ar gistineg , gant Denez Dorso	413/21
Ar Sterenn Aour , gant Mich Beyer	413/30
An Tad-kozh Nedeleg, pod-te Russel ha tammoù mitologiezh all , gant Yann Gerven	413/40
En ur lenn deizlevr Even dindan guzh , gant Malo Bouëssel du Bourg.	413/49
An harluad , gant T. Keruzore.	413/61

EÑVORENNOÙ

Menez-Gwenn (4807m) : Ar gedour hag ar Roue , gant Jean-Luc Le Floc'h troet gant Jean-Luc Le Floc'h	408/29
Buhez Youenn Gwernig berr-ha-berr , gant Daniel Kernalegenn	411/6
Va beaj Iraq , gant Anna Mouradova	412/72
E koun Andreu Gelleg (1918-2015) , gant Denez Pichon	413/65
Bet oc'h bet , gant Mai-Ewen	413/69

LIZHER

NY-Breizh / Breizh-NY , gant Skipailh Al Liamm.	411/12
---	--------

NOTENNOÙ

Notennoù , gant Annaig Kervella ha Tudual Huon	408/95
Notennoù , gant Annaig Kervella ha Tudual Huon	409/96
Notennoù , gant Annaig Kervella ha Tudual Huon	410/105
Notennoù , gant Annaig Kervella, Tudual Huon hag Herve Latimier.	412/109
Notennoù , gant Annaig Kervella ha Tudual Huon	413/105

PENNAD-KELAOUIÑ

A-dreuz lenn , gant Herve Latimier.	408/79
Petra nevez ? , gant Herve Latimier ha Malo Bouëssel du Bourg	408/85
A-dreuz lenn , gant Herve Latimier.	409/85
Petra nevez ? , gant Herve Latimier, Stefan Carpentier ha Malo Bouëssel du Bourg.	409/90
A-dreuz lenn , gant Herve Latimier.	410/93
Petra nevez ? , gant Stefan Carpentier ha Malo Bouëssel du Bourg	410/99

A-dreuz lenn , gant Herve Latimier	412/94
Petra nevez ? , gant Herve Latimier, Stefan Carpentier ha Malo Bouëssel du Bourg	412/100
Gouel al levrioù e Breizh 2015	413/83
A-dreuz lenn , gant Herve Latimier	413/92
Petra nevez ? , gant Herve Latimier, Stefan Carpentier ha Malo Bouëssel du Bourg	413/97

PENNAD-STUR

Pennad digeriñ , gant Tudual Huon	411/3
Ar bed en haiku , gant Annaig Kervella	412/3

PREZEGENN

Haiku, beaj e-kreiz bihanañ barzhoneg zo er bed , gant Malo Bouëssel du Bourg	412/11
---	--------

RAKLAVAR

Piv eo Agustín Fernández Paz ? , gant Mark Kerrain	409/46
---	--------

ROLL/RENABL

Roll pennadoù 2014 , gant Skipailh Al Liamm	408/105
Skridoù Youenn Gwernig , gant Daniel Kernallegenn	411/8

SAVBOENT

Treiñ pe krouiñ ? , gant Stefan Carpentier	413/78
---	--------

STUDI

Jul Gros, ur vuhez e-skeud dastum e deñzor , gant Frañsez Favereau	408/38
Un distrap eus buhez Max Jacob (lodenn 1) , gant Herve Gouedard	408/43
Un distrap eus buhez Max Jacob (lodenn 2) , gant Herve Gouedard	409/53
Ifig Jacob, kouer ha stourmer , gant Goulc’han Kervella	409/75
Bertsu ha kan-ha-diskan , gant Fanny Chauffin	410/67
Adam D. zo e kañv , gant Maguy Kerisit	410/82
An haiku : benveg priziañ live yezh ha nerzh krouiñ ar vrezhonegerien ? , gant Fanny Chauffin	412/25
Guy Etienne, ur vuhez gouestlet da ziorreadur ar brezhoneg , gant Laorañs Motrot	412/41
An Erevent , gant Armel ar Sec’h	413/73

Ar pennadoù dre skrivagner

ALLAIN DOMINIQUE

Ra vin daonet mar ned a ket ar maout genin er c'hoñkour (Danevell) .410/55

AN INTAÑV PASKAL

Un tarch melen (Danevell)410/29

AR C'HELLEG GWENN-AEL

Er sioulder (Barzhoneg)409/3

AR C'HOZH MARI-SOAZ

Un dibab haiku (Barzhoneg)412/5

AR FUR IWAN

Moonrise Medical (Danevell)409/23

AR SEC'H ARMEL

An Erevent (Studi)413/73

BETTINA

Cork-Pariz (Danevell)413/17

BEYER MICH

Ar Sterenn Aour (Danevell)413/30

BIHANNIG GARCIA JULIA

Va hud ha Dahud (Barzhoneg)	408/3
---------------------------------------	-------

BORISOVA JULIE

Ur varzhoneg evit farsal (Barzhoneg)	413/6
--	-------

BOUËSSEL DU BOURG MALO

Petra nevez ? (Pennad-kelaouiñ)	408/85
Petra nevez ? (Pennad-kelaouiñ)	409/90
Petra nevez ? (Pennad-kelaouiñ)	410/99
Un dibab haiku (Barzhoneg)	412/5
Haiku, beaj e-kreiz bihanañ barzhoneg zo er bed (Prezegenn)	412/11
Petra nevez ? (Pennad-kelaouiñ)	412/100
En ur lenn deizlevr Even dindan guzh (Danevell)	413/49
Petra nevez ? (Pennad-kelaouiñ)	413/97

BRAZ KRISTIAN

Bastard (Danevell)	410/44
Clearances (Danevell, s.o. Alistair MacLeod)	412/54

BRIAND GAEL

Hunvre ar re varv (Danevell)	413/12
--	--------

CARPENTIER STEFAN

Petra nevez ? (Pennad-kelaouiñ)	409/90
Petra nevez ? (Pennad-kelaouiñ)	410/99
Un dibab haiku (Barzhoneg)	412/5
Petra nevez ? (Pennad-kelaouiñ)	412/100
Treiñ pe krouiñ ? (Savboent)	413/78
Petra nevez ? (Pennad-kelaouiñ)	413/97

CHAUFFIN FANNY

Bertsu ha kan-ha-diskan (Studi)	410/67
Un dibab haiku (Barzhoneg)	412/5
An haiku : benveg priziñ live yezh ha nerzh krouiñ ar vrezhonegerien ? (Studi)	412/25

COUÉE IWAN

Glav a garan (Barzhoneg, s.o. Anne-Marie Quemper)	410/9
---	-------

COZ ANNIE

An deroù (Danevell) 409/15

DESKARD YANN

Requiem an dizesper (Danevell) 413/19

DORSO DENEZ

Enezenn (Danevell) 408/20

Ti ar gistineg (Danevell) 413/21

DREAN PATRICK

Un dibab haiku (Barzhoneg) 412/5

EMELYANOFF GWENAEL

Afer an unkorneg glas (Danevell, s.o. Agustín Fernández Paz) 409/47

FAVEREAU FRAÑSEZ

Jul Gros, ur vuhez e-skeud dastum e deñzor (Studi) 408/38

FERNÁNDEZ PAZ AGUSTÍN

Afer an unkorneg glas (Danevell) 409/47

GERVEN YANN

Bruderezh, kerent ha mignoned (Danevell) 409/8

AT333 (Danevell) 410/19

An Tad-kozh Nedeleg, pod-te Russel ha tammoù mitologiezh
all (Danevell) 413/40

GOUEDARD HERVE

Un distrap eus buhez Max Jacob (lodenn 1) (Studi) 408/43

Un distrap eus buhez Max Jacob (lodenn 2) (Studi) 409/53

GUILLAMOT YANN

An erv vili (Danevell) 413/10

GWENN FAÑCHIG

Denelezh velkonius (Barzhoneg)	408/8
Enebrezh (Barzhoneg)	413/5

HUON TUDUAL

Notennoù (Notennoù)	408/95
Notennoù (Notennoù)	409/96
Notennoù (Notennoù)	410/105
Pennad digeriñ (Pennad-stur)	411/3
Notennoù (Notennoù)	412/109
Notennoù (Notennoù)	413/105

IHUELLOU GARMENIG

Leper / Ypres - 1915 (Barzhoneg)	409/6
--	-------

JEANNE BOCQUENET-CARLE

Ruz an teod (Danevell)	413/15
------------------------------	--------

KERGHIBRAN IBRAHIM

Dizolo (Barzhoneg)	408/6
--------------------------	-------

KERISIT MAGUY

Adam D. zo e kañv (Studi)	410/82
---------------------------------	--------

KERNALEGENN DANIEL

Buhez Youenn Gwernig berr-ha-berr (Eñvorennoù)	411/6
Skridoù Youenn Gwernig (Roll/Renabl)	411/8

KERRAIN MARK

Piv eo Agustín Fernández Paz ? (Raklavar)	409/46
---	--------

KERUZORE T.

An harluad (Danevell)	413/61
-----------------------------	--------

KERVALAN

Nepenn (Barzhoneg)	410/3
--------------------------	-------

KERVELLA ANNAIG

Notennoù (Notennoù)	408/95
Notennoù (Notennoù)	409/96
Notennoù (Notennoù)	410/105
Ar bed en haiku (Pennad-stur)	412/3
Un dibab haiku (Barzhoneg)	412/5
Notennoù (Notennoù)	412/109
Notennoù (Notennoù)	413/105

KERVELLA GOULC'HAN

Ifig Jacob, kouer ha stourmer (Studi)	409/75
---	--------

KIRILL

Un dibab haiku (Barzhoneg)	412/5
--------------------------------------	-------

LATIMIER HERVE

A-dreuz lenn (Pennad-kelaouiñ)	408/79
Petra nevez ? (Pennad-kelaouiñ)	408/85
A-dreuz lenn (Pennad-kelaouiñ)	409/85
Petra nevez ? (Pennad-kelaouiñ)	409/90
A-dreuz lenn (Pennad-kelaouiñ)	410/93
A-dreuz lenn (Pennad-kelaouiñ)	412/94
Petra nevez ? (Pennad-kelaouiñ)	412/100
Notennoù (Notennoù)	412/109
A-dreuz lenn (Pennad-kelaouiñ)	413/92
Petra nevez ? (Pennad-kelaouiñ)	413/97

LE FLOC'H JEAN-LUC

Menez-Gwenn (4807m) : Ar gedour hag ar Roue (Eñvorennoù, s.o. Jean-Luc Le Floc'h)	408/29
--	--------

MACLEOD ALISTAIR

Clearances (Danevell)	412/54
---------------------------------	--------

MAHEO HERVE

Ultramarina (Barzhoneg)	409/4
-----------------------------------	-------

MAI-EWEN

Anjela hag he mamm (Danevell)	408/10
---	--------

Un dibab haiku (Barzhoneg)	412/5
Bet oc'h bet (Eñvorennoù)	413/69

MOTROT LAORAÑS

Guy Etienne, ur vuhez gouestlet da ziorreadur ar brezhoneg (Studi) ..	412/41
---	--------

MOURADOVA ANNA

Va beaj Iraq (Eñvorennoù)	412/72
---------------------------------	--------

PENNEG JIL

Yann-Bêr ar c'hontroller SNCF (Danevell)	410/11
--	--------

PÉTURSDÓTTIR ÓLÖF

Un dibab haiku (Barzhoneg)	412/5
----------------------------------	-------

PICHON DENEZ

E koun Andreu Gelleg (1918-2015) (Eñvorennoù)	413/65
---	--------

QUEMPEL ANNE-MARIE

Glav a garan (Barzhoneg)	410/9
--------------------------------	-------

SKIPAILH AL LIAMM

Roll pennadoù 2014 (Roll/Renabl)	408/105
NY-Breizh / Breizh NY (Lizher)	411/12

TABUTEAU PASCAL

Hunvreerez ar Pont (Barzhoneg)	410/5
Kleñved (Barzhoneg)	413/3

TANGI YANN-REUN

Disput etre ar vrenigenn hag al lapous-mor (Barzhoneg)	410/7
--	-------

TANGI LAN

Ar bromesa (Danevell)	409/34
-----------------------------	--------